

MANIFESTO “ KEN BIHAN HA KEN BRAS ALL “ TXIKIAK HANDI

Ni hag a sin amañ dindan, hag en anv an holl dud a vez dileuriet ganeomp,

NI A FELL DEOMP EMBANN :

- Kalz a yezhoù a zo dre ar Bed.
- Ar yezhoù a zo teñzorioù sevenadurel a zegas da vroioù ar Bed pinvidigezh ha liested sevenadurel.
- Ar yezhoù a zo binvioù a-bouez evit an diorren hag identelezh an dud.

NI A FELL DEOMP GOULENN :

- Gwir ar yezhoù minorelaet da vezañ doujet hag anavezet.
- Gwir ar yezhoù da gaout kement a skoazell hag a warez a zo ezhomm (en un doare ispisial en deskadurezh) evit ma vefe tizhet ganto ur stad a reizhded.
- Gwir hor yezhoù da vezañ anavezet dre lezenn war o holl zachenn.
- Ar gwir da vezañ ha da implij hor yezhoù er gevredigezh evit forzh petore danvez.

KEMER A REOMP AN DIVIZ DA:

- Gendelc’her da labourat evit ma teufe da vezañ implij hor yezhoù ur fed reizh hag evit sevel darempredoù etre an holl yezhoù bihan dre ma 'z eo gant an unvaniezh e teuint da vras.
- Skignañ an diskleriadur-mañ ar muiañ ar gwellañ.